

KANNADIG

IMBOTHARC'H

Kelaouenn Emglev An Tiegezhioù niv. 62 Eost-Gwengolo-Here 2009 Priz : 2 €

Tonkad kenstur ar Brezhoneg hag ar Feiz e Breizh

Bez' e lavar furnez ar bobl : « *Ret eo bevañ kuzhet evit bevañ evurus* ». Talvoudus e hañval bezañ ar sturienn-mañ, kenkoulz evit an dud hag evit ar pobloù. E gwirionez n'eo ket ret chom kuzhet, e ster strizh ar ger, evit bezañ evurus, met, d'an nebeutañ, chom hep bezañ un ergorenn¹ a c'hoantegezh evit ar re all. Un den paour pe ur vro baour ne vez ket, dre vras, evit dedennañ warnañ gwallc'hoantoù ar re all, unan pinvidik ne lavaran ket.

Evit he gwalleur e voe an tonkad-se hini hor bro : kaout un dalvoudegezh bennak - evit na lavarout gwirion -, evit hec'h amezeion eus ar Reter, daoust ma veze desket deomp, n'eus ket pell 'zo c'hoazh gant ar skol c'hall, e oa paour razh hor bro, ha mar ne vije ket bet Bro-C'hall aze evit reiñ deomp bara e vijemp marvet holl gant an naon-du. Ken mat e oa bet fardet ar bruderezh-se gant gwidre ar C'hallaoued, mistri daonet war an arz-se, ma voe kredet an dra-se gant ar Vrezhoneg e-pad pell, ha ma vez kredet c'hoazh hiziv, setu perak marteze e vez ken tenn gant an emsaverion dibikouzañ daoulagad o c'henvroiz, seul vui maz int bet intret, daoust dezho, gant doareoù soñjal ar C'hallaoued.

Ur wech lakaet he c'hrabanoù war hor bro hag evit he derc'hel da viken dindan gazel-gae, e oa ret da Vro-C'hall he divreizhekaat, ha da gentañ-penn e keñver he yezh. Mar ne voe ket re daer an divrezhonekaat dindan renad ar roueed c'hall, e voe un abadenn all gant an dispac'herion

c'hall ; da skouer : diskleriañ a ra Barère d'an 8 pluviôse, bloaz II ar Republik c'hall : « *Le fédéralisme et la superstition parlent bas-breton, le fanatisme parle le basque. Brisons les instruments de dommage et d'erreur. Il vaut mieux instruire que faire traduire, comme si c'était à nous à maintenir ces jargons barbares et ces idiomes grossiers qui ne peuvent plus servir que le fanatisme et les contre-révolutionnaires* » ; hag e deved an 8 pluviôse-se e c'heller lenn : « *Les prêtres ont exercé la plus cruelle influence en ne parlant que le bas-breton* », hag er mellad kentañ : « *Il sera établi dans les dix jours à compter de la publication du présent décret un instituteur de langue française dans chaque commune des départements du Morbihan, du Finistère, des Côtes-du-Nord et de la Loire Inférieure dont les habitants parlent un idiome appelé bas-breton*² ».

Kroget en deus da vat enta an divrezhonekaat gant an Dispac'h Gall – yezh an dispac'h, yezh ar bed nevez o c'henel e oa ar galleg, pa oa ar brezhoneg yezh ar bed kozh a ranke steuziañ -,

² Tra iskis, evit an dispac'herion-se e vez anvet bepred hor yezh « *bas-breton* », pezh a zo un droidigezh adal « *Breizh-Izel* », se a rofe da soñjal e vije bet an anvad-orin « *Breizh-Izel* » evit envel Breizh en he fezh, e keñver ur Vreizh-Uhel a vije bet Breizh-Veur hiziv, seul vui ma weler meneget, e deved an 8 pluviôse, al Liger Izelañ evel departamant ma veze komzet brezhoneg ennañ. (Breizh-Izel a vije neuze troidigezh an anv *Britania minora* arveret e latin an Iliz e-skoaz *Britania* a zo bet troet dre *Great Britain*, ar pezh a ziskouez ez eo Breizh a-vremañ un darn eus *Britain, The southeast one of the British Isles...*[evezhiadenn gant Paul Kalvez])

¹ Ergorenn : *objet*.

met tenn ha gorrek e voe an argerzh divrezhonekaat-se e-pad pell evit un abeg eeun a-walc'h : bez' e oa ag ar bobl vrezhoneger ur yoc'h fetis, bloc'h ar maeziou, e-lec'h ne oa ket kalz a dud evit beajiñ pelloc'h eget harzoù o farrezioù, o c'hanton ; n'o doa ket ezhomm eus ar galleg peogwir e kejent peurvuiañ gant dud a gomze brezhoneg evelto. Rediet e voe ar vugale da zeskiñ galleg er skol, evel ar vugale galloweger eus gorre ar vro evel-just, met o vezañ maz echue ar skol da zaouzek vloaz en amzer-se, ha ma kuitaent ar skol evit distreiñ da labourat en atantoù o c'herent evit an darn vrasañ pe evit deskiñ ur vicher e stal un dornwezhour³ eus ar barrez, da lavarout eo en ur metou ma veze komzet brezhoneg bemdeiz gant an holl, e veze trec'h ar brezhoneg adarre. Un abeg all a oa ivez : kreñv e oa ar feiz kristen e-touez ar bobl vrezhoneger gant ur sterniadur paskourel spirus ha stank a-walc'h, e-lec'h ma veze ivez implijet ar brezhoneg hepken etre ar feizidi hag ar veleion⁴, ken e lidoù an iliz hag e darempredoù ar pemdeiz ; kompren a reer mat-tre perak e vez skrivet e deved an 8 pluviôse : *“Embregent o deus ar veleion ar grisañ levezon en ur gomz brezhoneg hepken”*.

Meur a lankad a voe d'an divrezhonekaat, disheñvel an eil d'egile, met pep hini o reiñ e daol pigell da zismantrañ ar yezh :

- Ar servij soudard rediek hag ar brezelioù renet gant ar Stad c'hall a lakae ar Vrezhoned yaouank en ur stad a izelled e keñver ar C'hallaoued pa ne ouezent ket ar galleg pe e ouezent fall ar yezh-se, gant ur pouezh-mouezh spontus evit divskouarn tanav ar C'hallaoued, pezh a zegase goapaerezh warno. Ur wech distro d'ar vro e klaskent komz, lorc'h enno evit darn, an nebeut galleg o doa desket e-pad o servij soudard, met dreist-holl e oant mennet, evit un darn vat anezho, da chom hep treuzkas ar yezh d'o bugale evit n'o defe ket ken da ziwaskañ an doare mezhañ bet lakaet warno gant ar C'hallaoued ;

- Ar Vrezhoned o tivroañ a vil vern dre ma ne oa ket a labour a-walc'h er vro a zo bet un tammig heñvel e wered : pa zistroent d'ar vro evit ehanou an hañv pe evit mont war o leve e tegasent ganto ar galleg, ha war zigarez o devoa ankounac'haet un tamm mat eus o brezhoneg e redient tud ar vro

³ Dornwezhour : *artizan*.

⁴ Ne oa ket heñvel gant ar galloweg e Breizh-uhel, pa n'eo bet arveret nepred ar prezeg-se el lidoù ; ar sarmonioù, ha lod eus ar pennoù pa ne oant ket e latineg, a oa e galleg, pezh na vire ket evel-just ouzh ar veleion da gomz galloweg gant o farrezianiz, pa weladennent anezho war ar maeziou, peogwir e oant genidik alies eus an hevelep metou.

da implij ar galleg pa gaozeent ganto⁵, pe an eil a gomze galleg hag egile e brezhoneg evel em eus gwelet gant va mamm-gaer o kaozeal gant unan eus he c'hoar o chom e rannvro Paris, met tamm ha tamm e oa trec'h ar galleg.

- Ar vrezhonegerion a-vihanik o veajiñ muioc'h-mui en tu all da harzoù o farrezioù pe o c'hantonioù a geje gant brezhonegerion all a gomze ur brezhoneg un tammig disheñvel, da skouer Leoniz o kejañ gant Kerneviz ; e-lec'h ober ar striv da azasaat o brezhoneg ouzh hini o c'hendivizerion e kave aesoc'h dezho, evit en em gompren mat, da implij ar galleg⁶ dre ma ouient e oa an hevelep galleg a oa bet kelennet dezho er skol, pezh ne oa ket evit ar brezhoneg na oa na kelennet nag unvanet, hag aze e komprenet evel-just retvez ur yezh unvan, hag ur stad vrezhon dieub evit seveniñ he c'helennadurezh.

- Kiriek ivez an touristerezh a zegas milieroù a c'hallegerion e-pad an hañv e kêrioù an Arvor, hag a zo bet, e gwirionez, ar re gentañ o koll o brezhoneg.

Hogen, kement-se ne oa ket marteze brasañ distrujer ar yezh. Adalek ar bloavezhioù pemont e teu ar galleg e pep tiegezh gant ar skingomz hag er bloavezhioù c'hwegont gant ar skinwel⁷. Tud an Emsav o deus komprenet buan e oa aze ur riskl bras evit hor yezh hag o deus goulennet hag azgoulennet e vije skignet abadennoù brezhonek, met ar galloud gall, a oa e c'hoant brasañ lazhañ ar brezhoneg⁸ abaoe pell a nac'he groñs plegañ da aspedennoù ar Vrezhoned, ha mar deo bet pleget un nebeut d'o c'hoantoù a-benn ar fin, e oa se un tammig heñvel ouzh ar sigaretenn diwezhañ roet d'an hini kendaonet d'ar marv, dre ma ouezed e oa dizañjer bremañ, pe hervez komzoù c'hwerv Goulven Pennaod en ur pennad e galleg a-zivout ar brezhoneg, bet embannet ugent vloaz bennak

⁵ Ur seurt goapaerezh war an tu gin a zle bezañ bet memestra, a gaver gant “sorbienn ar rastell” am eus klevet distaget e brezhoneg gant va zad-kaer : ur Brezhon yaouank eus Paris o tremen vakañsoù er vro a ra van da vezañ disoñjet anv ar benveg-se, ur rastell ; bez' e respont ar c'houer aterset gantañ : « laka da droad warni hag e lavaro dit hec'h anv ! » ; ar paotr yaouank a laka e droad war gein ar benveg evel evit c'hoari, pezh a ra da fust ar rastell en em wintañ a-daol trumm ha dont da skeiñ anezhañ e kreiz e zremm. Souezhet mik e laosk ar paotr : « Gast a rastell ! » Deuet e oa dezhañ en-dro anv ar benveg, evel dre vurzud.

⁶ Piv n'en deus ket klevet an digarez toull-mañ : « n'eo ket memes brezhoneg » evit reizhabegañ implij ar galleg.

⁷ « *Je suis également heureux que la télévision ait été un facteur d'unification linguistique. Il est temps que nous soyons français par la langue* ». Robert. Pandraud, extraits des débats sur l'Europe de Maastricht, 13 mai 1992.

⁸ “*Surtout rappelez-vous, messieurs, que vous n'êtes établis que pour tuer la langue bretonne*”. Komzoù un is-prefed, eus departamant Penn-ar-Bed, d'ar skolaerion e 1845.

'zo er gelaouenn c'hall "*Le Crapouillot*" : "*On ne tire pas sur les ambulances*".

Ar Brezhoneg hag ar Feiz a zo breur ha c'hoar e Breizh

Brudet eo bet ar c'hrenn-lavar-mañ er brezhonegva e-pad pell, hogen hiziv n'eo ket mui evel-just, peogwir, er metou e-lec'h ma pleder ar muiañ gant ar brezhoneg er mare-mañ, da lavarout eo ar skolioù Diwan, en em ziskleriont laïk penn-da-benn evit bezañ deuet mat d'ar Stad C'hall, neuze ne vez ket anv da gomz eus relijion er c'hlasoù. Daoust hag ez eo gwelloc'h an traoù er skolioù kristen divyezhek ? Ne gredan ket, war pezh am eus klevet, ha dre eo aet da get an endro kristen hengounel e vez trec'h eno ivez ar stuzegezh arnevez ; ha forzh penaos ez eo ret dezho bremañ heuliañ programmoù an Deskadurezh "Vroadel" Gall, dre o c'hevrat gant ar Stad.

Pezh a felle din keñveriañ dreist-holl e oa diskenn kenstur an div, yezh ha feiz, d'ar bez. Fellout a rae d'al laïkouriezh-stad lazhañ kenkoulz ar brezhoneg hag ar relijion, se 'zo sur, ha tost ez int deuet a-benn. M'hor bije bet ur stad vrezhon dieub e c'heller goulakaat e vije bet disheñvel an traoù memestra, met siwazh ne oa ket diouti. Ul levezon vras en deus bet ar skinwel war ar relijion evel war ar yezh daoust maz eo bet evit abegoù disheñvel. Deuet eo ar skinwel e pep ti er bloavezhioù c'hwegont ; hag er bloavezhioù-se ez eus bet ivez brizh-dispac'h miz Mae c'hwegont-eizh. Lavarout a reomp "brizh-dispac'h", hogen, e-keñver buhezegezh, divezelezh, revelezh, ez eo bet ur gwir zispac'h. Pezh a oa endeo buhezegezh un nebeut tud, tud ar fiñvskeudennerezh hag ar *show business* dre vras, hag en Amerika dreist-holl, a zo deuet da vezañ stalon-buhez evit an holl ha da gentañ-penn evit ar re yaouank, ha se dre ar skinwel, bet sunet ganto evel laezh divvronn o mamm adalek o blinañ yaouankiz⁹. Ar filmoù bet kenderc'het a-raok ar bloavezhioù c'hwegont a heulie bleinreolenoù divezel strizh dre-ma oant tonket da vezañ luc'hvannet e-barzh salioù publik ; gant ar skinwel e teue an traoù da vezañ disheñvel : dont a rae ar filmoù skingaset da vezañ un afer prevez. "D'ar gerent da ober an dibab evit o bugale", a lavare ar genderc'herion filmoù, "ned omp ket ni un aotrouniezh divezel". Ouzhpenn-se, en un nebeut bloavezhioù, ez eo deuet ar skinwel un doare "*moloc'h*" a

c'houlenne muioc'h-mui a filmoù evit boueta an holl chadennoù disheñvel ha kevezerezed etrezo, ha setu maz eo bet ijinet ar filmoù-skinwel, a bade a-boan un eurvezh evit gellout klenkañ en o c'hreiz ur bajennad bruderezh. Hogen, arabat e oa sevel ar filmoù-se war skouer filmoù-tadig, ret e oa diskouez er filmoù-se ar vuhez evel m'emañ, ha diskouez pep tra eus ar vuhez-se, a veze lavaret. E gwirionez, dre e severerion filmoù o labourat a heligentañ etrezo, e kroue ar skinwel doareoù bevañ kevredigezhel digabestret kenañ, dianav betek-henn, e-keñver an darempredoù etre paotr ha plac'h, an dizimezi, an avoultriezh, an eured dieub, ar revelezh, ar sioc'hanerezh, an heñvelreviadezh... hag ez eo ar re yaouank a heulie pezh a veze diskouezet dezho gant ar skinwel ha n'eo ket an diac'hin¹⁰, evel ma vez lavaret dre vras. Tud 'zo a rebech d'ar skinwel skignañ filmoù ma vez enno re a feulster, gwir eo, met pezh a zo a re, ez eo dreist-holl an arvestennoù revel, diezhomm evit an istor peurliesañ, hag ar penntudennoù livet gant ar filmoù-se – ar steudadoù-kerreizh¹¹ da skouer – ned int nepred tadoù a diegezh normal, met tud dizimezet, kudennoù gant o bugale ha gant o gwraez bet. Enebet o deus ar gerent en derou p'o deus gwelet o bugale oc'h heuliañ ar gizioù nevez-se, ur verc'h o vont da annezñ gant ur paotr hep dimeziñ, met buan o deus pleget, levezonet ma oant bet d'o zro gant ar skinwel, ha gant ur c'hedveno diseblant en-dro dezho.

Hag an Iliz e kement-mañ ? Tonkus ivez eo bet eviti ar bloavezhioù c'hwegont. Er bloavezh 1965 ez echuas Sened-meur Vatikan II, da lavarout eo tri bloaz a-raok miz Mae 1968. Daoust ma ne oa ket se penn-da-benn, e voe desellet Vatikan II evel an dispac'h en Iliz, un Iliz ma oa ret digeriñ frank d'ar seizh avel dorioù ha prenestroù anezhi, evel re un ensavadur kozh leun a boultrenn ennañ Ha pa zeuas emsavadeg Mae 68 e kredas da veur a ezel eus an Iliz, ne c'hellent nemet heuliañ peogwir e felle dezho, int ivez, e vefe kemmet an traoù, met kollet o deus an dorn er c'hoari-se, ne oant ket mistri ken war ar jeu. N'o deus ket kredet digeriñ o genoù pa c'hoarvezas trevonnadoù¹² er vuhezegezh evel da geñver al lezenn oc'h aotren ar sioc'hanerezh, ar bilulenn hilastaliñ, an dimezi etre heñvelrevidi... E-lec'h bezañ desellet bepred, gant ar vrasañ eus an dud, evel an aotrouniezh divezel ma oa bet e-pad kantvedoù, e oa deuet an Iliz da vezañ un aozadur evel ar re all, evel ar

⁹ Se a ra din soñjal evel-just en ur flemmdresadenn gwelet ganin en ur gelaouenn bennak ma weled enni ur babig o sunañ skramm ur skinweler neuz ur vronn gantañ.

¹⁰ An diac'hin : *ar c'hontrol*.

¹¹ Steudadoù-kerreizh : *séries policières*.

¹² Trevonnad : *débordement*.

sport da skouer, met ar sport en deus kalz muioc'h a bleustrerion eget an Iliz d'an deiz a hiziv. Hag evit pezh a sell ouzh an divez, ar reolennoù buhez, a oa bet damani viret an Iliz betek-henn, krennet mui pe vui e gourc'hemenoù Doue, ne vez mui selaouet kalz he c'helennadurezh¹³ 'm eus aon, hogen an hini

¹³ Gwelet hon eus, n'eus ket pell, ersavioù ar meziennoù ha re an dud dre vras p'en deus klasket ar Pab eztaoliñ e vennozhioù e

dibunet hiviziken gant an Iliz nevez, ar skinwel, ne lavaran ket.

Hag ez eo evel-se eo deuet ho merc'h da vezañ mut, evel ma lavar ar C'hallaoued.

Donwal Gwenvez

keñver buhezegezh ha divezelezh.

Addisplegoù war frazennoù Simone Weil

An doare-komz dre zamzislavaroù a vez arveret ez-naturel gant ar gevrinourion ; an doare-komz-se avat ne c'hall ezteurel forzh pe wirionezenn e vefe, nemet a-vetaforennoù, hag en un doare disklaer dre ret. Na ped gwech, a-hed an Istor, n'eo ket bet dinaturet ar garantez ouzh Doue en ur garantez ouzh an disklaered, en ur zisteurel ar gwirionezennoù anatañ, en ur firboucherezh e-mesk dislavaroù tidel ha diezhomm ! Den ebet ne nac'hfe ez eo mennet-mat ar sofisterezh-se, peogwir e klask lakaat chikan etre ar selaouerion hag o foell, peadra dezho da glask goudor e divrec'h ar feiz war-lerc'h. Dipitus-kenañ e c'hall bezañ an disoc'hoù koulskoude, da skouer e c'hall ar prezeger e-unan em goll el las stignet gantañ ; an dra-se a zo ur fed anat ivez, daoust ma ne vez anzavet hogos morse. A zo muioc'h, seurt prezegerezh a c'hall servij an diaoul koulz ha Doue ; feuket e vo lod moarvat gant an diskleriadenn-mañ, padal e vez kretaet diehan gant istor ar preder e bed ar c'hornog. Jezuz ivez en doa dija merket an dra-se : "Lavarit : *ya, ya, ket, ket*- ar peurrest a zo kaoz Paol Korneg."

An doare deologiezh dre-nac'hañ a zo e-giz-se hendad da gammdroioù an daelerezh e prederouriezh Hegel, Marks pe Nietzsche. Doue a ziskar gouiziegezh ar ouizieion hervez ar Bibl, gwir eo. Ha digarez e rank kement-se bezañ avat d'ar ouizieion da ziskarañ o-unan o gouiziegezh, war zigarez gourdoniñ evit an *dazont* ?

N'eo ket trawalc'h ar misterioù-komprenet-gant-Doue-hepken evit hor boemañ ? Ha ret e vefe hadañ damzislavaroù tidel war holl hentoù an douar ? Peseurt talvoudegezh a vefe d'ar misterioù uhelañ, pa ne vefent ket komprenet gant Doue zoken, forzh penaos ? O Ster eo a ro talvoudegezh dezho, ha neket an deñvalijenn war o zro. Sed aze an disparti tanav ha luziet a zo etre ar gwir gevrinouriezh hag an touellerezh. Hag e

pep skrid kevrinour ez eus hadennoù touellerezh - e re Simone Weil evel er re all. Labour an addispleger a zo diforc'hañ an ed a-douez an dreog.

Er pajennoù da heul e restan hag e addisplegan, hep steuñv arbennik, arroudoù eus oberenn Simone Weil ma vez ezhomm ober an disparti-se (an holl arroudennoù a zo bet tennet e *La Pesanteur et la Grâce*, Plon, Pariz, 1948. An niverennoù pajenn war o lerc'h a ra dave d'an embannadur-se).

Kregiñ a ran gant an arrouden-mañ :

Ar c'hoantegezh ne c'hall ket bezañ torret ; distruj a ra he fal. Ar c'halanted ne c'hallont ket bezañ unan, ha Narkisus ne c'hall ket bezañ daou. Don Juan, Narkisus. Ret eo c'hoantaat an netra peogwir ne c'haller ket c'hoantaat un dra bennak (p. 111).

Lavarout e vez klasket an unanded gant ar c'halanted a zo un doare da gaozeal hep muiken, ha ne c'hall bezañ kredet ger-evit-ger nemet gant unan bennak a zo an orged un dra estren outañ penn-da-benn. Ur galant a fell dezhañ emreiñ d'e gariad ha resev anezhi war un dro ; neket steuziañ enni hag hi o steuziañ ennañ war un dro. An orged n'eo ket steuzidigezh, miridigezh hag advuhezekaat ne lavaran ket : miridigezh ar spesad, advuhezekaat an hiniennoù hag an ere etre priedoù.

Na Don Juan na Narkisus ne ouezont netra ebet war ar pezh eo an orged. Na Simone kennebeut. Keal an eil o steuziñ en egile a zo just-a-walc'h termenadenn ar c'hadaliegzh dinatur, ar c'hadaliegzh bet tennet diouti pep madelezh ha pep santimant-gwareziñ.

Hervez Sant Tomaz Akwino, "karout a zo c'hoantaat e vefe diamzer ar boud karet". Eus

kenemsalvidigezh ez eus anv neuze, ha neket kenemsteuzidigezh. Moarvat ez eo aesoc'h kompren an dra-se eus ur sellboent muslimat, m'az eo an orged ur sakramant drezañ e-unan e-lec'h bezañ ur gwir deroet gant ur sakramant all en a-raok (ken ez eo dianav meizad an "eured relijiel" en Islam). Seurt savboent n'eo ket dianav a-grenn er bed kristen, a-hend-all : ar priedoù eo ar re a gas da benn sakramant an eured, ha neket ar beleg. Pa soñjer ervat, forzh pe koublad en em ro d'an ober a embarañ a-unan gant meizad an unanidigezh didorradus a ranker sellet outañ evel euredet, ma kompren ar gelennadurezh kristen betek ar penn pellañ. Dre zegouezh hepmuiken, evit abegoù istorel, ez eur en em lakaet da sellet ouzh an eured muioc'h-mui evel ul lid kevredigezhel ha nebeutoc'h-nebeut evel un dra stag ouzh an orged end-eeun. Evel-se eo bet kollet penn-da-benn meizad naturel ha kentañ an darempredoù etre gwazed ha maouezed, hag eo troet an eured d'un doare louzaouenn-betek-gouzout-gwelloc'h evit ur pec'hed na c'haller ket tec'hout dioutañ.

An dic'hallus a zo an nor davet an dreistnaturel. Skeiñ war an nor ne c'hellomp ken. Unan all eo a zeu da zigeriñ deomp. (p. 112)

Un dra a c'hall bezañ dic'hallus e daou zoare disheñvel : pe eo divezus, dic'hallus penn-da-benn, pe neuze eo dic'hallus ez-fizikel hepmuiken. An darvoudoù dreistnaturel a dorr lezennoù fizikel an douar patatez-mañ, met ne c'hellont ket terriñ lezennoù ar boud (evel ma lavar Sant Tomaz Akwino, Doue ne c'hall ket diskarañ poelloniezh Aristotelez). Evit ar pezh a sell ouzh an dic'hallusted fizikel, ne anavezomp anezhi nemet a-lommoùigoù berrbad, hag arouezel e gwirionez ; ne c'hallomp ket arnodiñ ganti, ha ne vevomp anezhi nemet en hon dec'hmeg.

Neuze, ma klaskomp tizhout harzoù an "dic'hallus" e reomp unan a zaou dra : pe e soñjomp ez-difetis en "divezus" hollvedel pe e fell deomp trec'hiñ war un dic'halluster resis (da skouer, unan seizet o klask fiñval) . War pehini eus an div zor-mañ e rankomp skeiñ ? En degouezh kentañ, Doue a zo diskoulmenn ijinet d'ur gudenn ijinet. En eilvet degouezh, ma vez unan o tigeriñ an nor, hag a ra d'an dic'halluster fizikel teuziñ, e c'hoarvez ur burzhud evit gwir. Mard eo evel-se emañ kont, n'eus nemet ur burzhud fizikel a c'hall digeriñ an nor a gas da Zoue, hag an droienn "burzhud a feiz" ne vefe

nemet ur vetaforenn, un doare da gaozeal, peogwir n'eus netra gwall vurzhus e diskoulmañ en hon dec'hmeg ur gudenn ijinet. Padal, Jezuz a gendaon taer ar re a c'houlenn burzhudoù da brouenn. Neuze, *ar gredenn ez eo an dic'hallus an nor nemeti davet an dreistnaturel a zo faos, pe enepkristen a-grenn d'an nebeutañ.*

Ret eo santout an dic'halluster evit dont er-maez eus un hunvre. En un hunvre n'eus netra dic'hallus. (p. 112)

Ur wech ouzhpenn, Simone a grog dre stadañ ur wirionezenn voutin eus hor buhez pemdeziek, hag a astenn ar wirionezenn-se war-lerc'h en un doare faos.

Gwir eo ez eus tud a vev en un hunvre beurbadel ha ne gejont morse gant keal an dic'halluster en abeg da se ; gwir eo ivez e c'hellont bezañ dieubet eus o hunvre dre anzav un dic'halluster bennak.

Padal e santer mat-tre an dic'halluster fizikel e hunvreoù 'zo, da skouer pa vez ur pellder o kreskiñ diehan a-feur ma redomp evit treuziñ anezhañ. En un hunvre a-seurt-se e santer "ez-vev" un dic'halluster fizikel, ha neket ur skoilh dre zegouezh.

N'eo ket ar santimant a zic'halloud eo a ra diouer d'an hunvreoù, muzul an derezioù etre ar c'hallusted hag an dic'hallusted ne lavaran ket, da lavaret eo santimant ar pezh a zo gwirheñvel, kempoell, tebek.

A-geveskemm, ar santimant a zic'halloud hollek, pa vez bevet er stad dihun, n'eo nemet un hunvre, ur gwallhunvre da vezañ pareet gant un hunvre gaer anvet Doue. Un diskoulmenn ijinet d'ur gudenn ijinet, ur wech c'hoazh. An dud gouvidik a vev en un hunvre beurbadel a zic'halloud, ha n'eo ket evit keloù-se ez int tostoc'h d'ar gwirvoud eget ar re foll pe an diouganerion.

Skarzhañ kuit santimant ar pezh a zo gwirheñvel evit dic'hoanekat unan bennak ha war-lerc'h kinnig dezhañ an diskoulmenn-diwezhañ-choaz anvet "feiz" a c'hell bezañ un dro-vicher devot a-fed prezegoniezh, met ne c'hall ket bezañ degemeret e prederouriezh. Ur c'hamdro diouzh doare Gurdjieff eo, ouzhpenn-se : tizhout ar wirionez dre ar gaou, evel pa c'hallfed ober seurt tra, evel pa ne vefe ket lousaet ar wirionezenn bet tapet e-giz-se gant hec'h orin vil. Ar brezegegerion gatolik a arver an hentenn-se betek kalz re, hep

gwelet e vez breinet ar feiz diwar se. *Bilinguis maledictus*, a-benn ar fin. Gwelloc'h ganin ar gourc'hemenn koranek : *ar wirionez a dizhot dre ar wirionez*.

"*Hon Tad, hag a zo en neñv...*" *Un dra fentus un tammig a zo aze. Tad eo deoc'h, met klaskit 'ta mont d'e gerc'hat e krec'h ! N'omp ket evit nijal kuit muioc'h eget ur penn-preñv en douar. Nag Eñ, penaos e c'hellfe mont deomp hep diskenn ? N'eus doare ebet da jaojañ an darempred etre Doue ha mab-den a vefe komprenadusoc'h eget keal digomprenadus an Enkorfadurezh. An Enkorfadurezh a lak ar fed digomprenadus-se da vezañ lugernus evel an heol. An doare fetisañ eo da veizañ an diskenn dic'hallus-se.* (pp. 112-113)
Pa c'houlenn ur prezeger kristen ouzhimp krediñ e fed an Enkorfadurezh ha pa zifenn ouzhimp war un dro degemer *galluster* an Enkorfadurezh-se, emañ o kunujiñ hor poell. Ar pezh a zo a c'hall bezañ, anat. Bezus eo an Enkorfadurezh, pa'z eo c'hoarvezet. Na pa ne vefe ket c'hoarvezet, e chomfe c'hoazh daou abeg ramzel d'he bezuster : da gentañ eo enbarzhet e keal an Hollc'halloud ; da eil e vez diouganet en Testamant Kozh.

Kompren (pe kompren fall) an Enkorfadurezh evel ur fed dic'hallus a zo nac'h ar bed krouet, ha neket rentañ klod dezhañ. Ma lakaomp chikan etre fed an Enkorfadurezh hag ar poell, e lazhomp er vi an holl drabedoniezh hag an holl vedoniezh kristen. Tremen a reer e-giz-se eus keal gwir un Doue a-us d'ar bed d'un Doue a-enep d'ar bed, un euzhvoud diskiant leun a gasoni ouzh e oberenn ha peurvatic'h seul vuioc'h ma stourm outañ e-unan. Dalc'hmat ez eus ur riskl da dreiñ Doue da Ziaoul pa heulier keal Doue-a-us-d'ar-bed betek ar penn pellañ. Ur respont a-berzh Doue eo an Enkorfadurezh er par-se, d'ar re a vefe troet d'en em zarsevel a-enep d'ar bed.

Ya, bezus eo an Enkorfadurezh, bezus *eminenter* eo zoken : keneve dezhi ne vefe ket eus ar bed. Ma ne c'hall ket Doue bezañ den, denion ne c'hall ket bezañ anezho. Analogiezh gant ur skwer eus ar boutinañ seurt hen diskouez diouzhtu : petra a vir ouzh ur skrivagner a en em lakaat evel tudenn e-mesk an tudennoù krouet gantañ ?

"D'ar 5 a viz genver d'abardaez, en e sav dindan disheoler tavarn Guido ha Junín, Bruno a welas Sabato o tont ..." (Ernesto Sabato, *Abbadon el Exterminador*, Buenos Aires, Sudamericana, 7^{vet} emb., 1977. p. 11).

Ar santimant a ziwirheñveded santet gant ar re zizoue dirak keal an Enkorfadurezh a vez kemeret gant Simone evit meizad klokañ ha diwezhañ an hollved. Foeñvaat ez-ramzel santadennoù berrbad e-giz-se a zo unan eus merkoù-anaout *modus eloquendi* ar c'hallegerion dre vras. Diwar un doare kamm da gaozeal e tastumer, en un doare gall-penn-kil-ha-troad, heuliadoù prederouriezhel bras-meurbet...

Ne welan ster ebet er fed kemmeskañ ar pezh a zo marzhus gant ar pezh a zo dic'hallus, estreget en ur vetaforenn. Boutin eo er relijionoù, a-hend-all, arouezioù ar gwirionezioù marzhus a vez komprenet evel "traoù digredus" gant ar re zizoue. N'eo ket digredusoc'h keal an Enkorfadurezh (ar werc'hez a wilioud an den-doue) evit unan dizoue er bed kristen, eget keal unan na oar na lenn na skrivañ en em lakaat da sevel ar c'haerañ levr a zo, diktet dezhañ gant Doue, er bed muslimat. Met evit neb a zo boaziet un disterañ d'an drabedoniezh, hini eus an daou dra-se n'en deus ezhomm bezañ dic'hallus evit boemañ, nag ezhomm bezañ diskiant evit bezañ gwir.

"*Roma a zo un aneval bras, dizoue, danvezelour, na azeul nemetañ e-unan. Israel a zo un aneval bras relijiel. Hini eus an daou re-se ne zellez bezañ karet. An anevaled bras a vez euzhus dalc'hmat.* (p. 185)

Bed kristen ar c'hornog a zo un aneval bras a c'hoari emkroazstagañ hag a gouezh gant holl bouez e groaz-a-salvidigezh war bobloù na c'houlennont bezañ dieubet eus netra estreget eus an alouber kristen.

Ar gristenion a lak bepred gwalleurioù ar sevenadurioù nann-kristen war gont relijionoù piaouel ar sevenadurioù-se, hag o gwalleurioù dezho o-unan war gont restachoù kentkristen pe enepkristen ar bed kornogel. Pa vez troc'het daouarn al laeron gant ar vuslimiz, eo peogwir eo kriz ha barbar o c'hravez. Pa veze troc'het divskouarn ha frioù Persed dizrouk gant Alfoñs a Albuquerk, eo peogwir n'oa ket bet kristenaet awalc'h, daoust dezhañ bezañ kannad armet an Iliz d'an ampoent. An Enkeiserezh a zo ur fazi-dre-zegouezh, devidigezh levraoueg Aleksandria avat a ziskouez gwir zremm an Islam.

Evel-se e vez dalc'hmat pa soñjer en un doare kengladelour, a zo ur savboent faos zoken pa vez diazezet war wirionezioù diskuliet. Reiñ a ran amañ dindan un arroud eus ma *z-Deizlevr*

Prederouriezh (notenn an 10 a viz kerzu 1991) : Pennaennoù anat evit studi-dre-geñveriañ ar relijionoù :

1. Keñveriañ mennozhioù gant mennozhioù, fedoù gant fedoù. Ar varaneged, er c'hontrol, a geñver mennozhioù o c'hravez gant fedoù istorel ur gravez all. Da lavaret eo : gwir natur ma relijion a zo en hec'h uhelvennadoù, hag an torfedoù graet en hec'h anv n'int nemet degouezhioù na dizhont ket anezhi ; gwir natur relijion ma amezeg a zo en torfedoù graet en hec'h anv, hag hec'h uhelvennadoù n'int nemet ur maskl ideologel.

Evel-se e tro ar feulsterioù graet en anv an Iliz da wallzarvoudoù a netra, hag ar re graet gant muslimiz da brouennoù war natur gwadek an Islam. Heñvel fazi a vez graet gant S. H. Nasr en e levr *Ideals and Realities of Islam* : e-lec'h keñverian ar bed muslimat hengounel ouzh ar sevenadur arnevez, ne ra nemet keñverian uhelvennadoù an hini kentañ ouzh buhez dic'hoanagus an eil.

2. Dre ar frouezhioù ez anavezoc'h anezho. A-fed sokiologiezh d'an nebeutañ, an dogmenn gourbannet fraezh a gont nebeutoc'h eget an doare ma vez komprenet an dogmenn-se *e devout* gant ar bobl-mañ-pobl d'ar marevezh-mañ-marevezh. E deroù ar XIXvet kantved, da skouer, e c'helle unan bezañ katolik mat hep diskouez an disterañ karantez ouzh an nesañ ; met ne c'hellfe ket bezañ hep diskouez, en e lavar d'an nebeutañ, fealded d'an unveliouriezh ha kasoni ouzh an Dispac'h. Katoligiezh *ar marevezh-se* a zo kilstourm dreist-holl. Memes mod, hiziv e c'haller bezañ ur "breur muslimat" a-zoare hep degemer ar gristenion evel breudeur a feiz, o tisteurel neuze skwer ar Profed; met ne c'haller ket bezañ hep magañ kasoni ouzh ar "Satan bras" norzhamerikan.

"Kement a vez desket gant ar skiantoù pe ar poell a zo martezeadennel. N'eus nemet ar garantez dreist-naturel a zegas anaoudegezh solut". (p. 38) Ar santimant a ziboellded hon eus a-wechoù o welet ar bed a zo martezeadennel ivez, hag ar garantez dreist-naturel a ziskoulm ar santimant-se dre zaskorañ deomp ar Ster. A garantez dreist-naturel Doue evidomp ez eus anv amañ avat, ha neket ag hon c'harantez Evitañ, nebeutoc'h c'hoazh an hini a gemer stumm arbennik ar feiz kristen - rak Doue, dre ar Spered Santel, en deus roet meizad ar Ster d'an holl denion, neket d'ar

gristenion hepken. Peotramant e vefe bet dizanav Ster ar vuhez d'an holl, kent donedigezh ar c'hentañ prezeger kristen.

Ar garantez evit an damzislavaroù a zo un doare arrizhelouriezh prizet kalz gant ar gevrinourion. War zigarez karout Doue, e reont van na gompren un dra a gomprenont mat-tre e gwirionez, peadra da dennañ plijadur eus ar santimant a ziboellded ha joa eus ar santimant a frealz war-lerc'h, evel pa vefe ur burzhud a feiz o c'hoarvezout.

"N'eo ket ar fazi a ra d'ar pec'hed bezañ marvel, met an dregantad gouloù hag emskiant a zo en ene pa vez graet ar fazi, forzh peseurt fazi e vefe." (p. 38)

Ya sur, met hag-eñ n'eo ket dañjerusoc'h c'hoazh eget ar pec'hed marvel, an temptadur da lazhañ ar gouloù evit mirout ouzh ar pec'hed a vezañ marvel ? Evit ma c'heloù, gwelloc'h ganin mil pec'hed marvel eget ar pec'hed a-enep d'ar Spered. Pa ne c'hellan ket trec'hiñ war un temptadurenn astudik anez krouiñ reuz spontus em ene, e kavan gwelloc'h pec'hiñ o c'houzout ar pezh a ran, hag em daspren o c'houzout ar pezh a ran, kentoc'h eget ober d'am c'houstiañs tevel evit pec'hiñ ez-digablus - an digablusted dinatur-se a zo e orin an neurozoù hag ar bredkleñvedoù taer (anezho arouezioù an troc'h gant ar Spered), evel m'eo bet merket mat gant Igor Caruso. P'az eus bet klevet gant an dud, e-pad daou vil vloaz, kalz muioc'h a c'houzavioù taer war dañjer ar pec'hed marvel eget war dañjer ar pec'hed a-enep d'ar Spered, ha souezhus eo e vefe boutinoc'h-boutinañ hemañ ?

Kemeromp, da skouer, degouezh ar falstesteni. Hag-eñ n'eo ket gwelloc'h d'unan bennak, evit noazout ouzh un enebour, livañ ur manch gevier en un doare diaoulek, makiavelek, fallakr ha toud, kentoc'h eget tizhout an hevelep pal o lakaat meskaj ha teñvalijenn en e goustiañs betek emgendrec'hañ eo gwir ar gaou lavaret gantañ ? An neuroz ganet diwar se, an aergelc'h a c'haou hag a emdouell a aloub ar bersonelezh a-bezh, n'eo nemet un arouez-a-ziwar-c'horre eus ur gasoni don ouzh ar Spered.

Marteze e veve Simone en ur marevezh ma oa boutinoc'h ar pec'hedoù marvel ordinal - laeroñsi, avoultriezh - eget argasidigezh ar Spered, hiziv gourc'hemenn kentañ ar vuhez er gevredigezh.

An diboellded-a-ratozh pleustret gant lod kevrinourion gristen (ha muslimat ivez, war am eus bet tro da verkañ) a zigor dirazomp islonk ur gevvinouriezh hep gouiziegezh ebet war-dreñv.

Olavo de Carvalho

Lakaet e brezhoneg gant **Ewan Delanoy**. Prezegenn distaget evit ar wech kentañ er *Seminário de filosofia* d'an 9 a viz genver 1994, lakaet dre skrid d'ar 9 a viz genver 1998 (notenn : peogwir e oa hir a-walc'h an destenn orin em eus tennet kuit 10% anezhañ en droidigezh-mañ).

Ur c'houzavadenn ha na zoug ket da c'hoarzhin

Gouzout a ra an darn vrasañ eus an dud, d'an nebeutañ en hor bed kornogat – met se n'eo ket ken sur hiziv ha ma oa gwechall, siwazh, dre maz eo hor bed kornogat gwall zigristenet – ez eus bet meur a wech e-kerzh an daou vilved tremenet, meur a c'houzavadenn¹⁴ a-berzh Doue, evit mirout ouzhimp da guitaat an hent bet treset deomp hervez kelennadurezh Jezuz, evel ma rafe ur mesaer na fell ket dezhañ lezel e zeñved pe e worzheg¹⁵ mont da beuriñ er pradeier n'int ket dezhañ, pe da beuriñ louzeier fall a rafe droug d'e zeñved pe d'e worzheg. Evit skoazellañ anezhañ, da evezhiañ ouzh e dropell, en deus ezhomm ar mesaer eus unan pe zaou eiler, da lavarout eo : unan pe zaou gi, pe muioc'h c'hoazh, hervez ment an tropell. Hiziv an deiz ne servij mui kalz ar c'hiier-se¹⁶, amsavet maz int bet alies gant ur bugul-tredan ; ne vern, chom a ra mat ar skeudenn-se evit ar geñveriadenn a fell din ober.

En amzer an Emglev kozh e veze anvet “profed” ar c'hiier-deñved-se, ha ne oant ket kiier evel-just, met tud a feiz hag a furnez, dibabet gant Doue e-touez pobl Israel, evit gouzaviñ anezhi a-zivout kastizoù o tont mar ne baouez ket gant he fec'hedoù. Gant ar gristeniezh ne vez mui arveret ar ger-mañ, “profed” - dre zoujañs marteze ouzh an dud veur-se evel Eliaz, Izaia, Yezekael, Yeremias...-, met komzet e vez peurvuiañ eus “gwelourion”, “gwelourezed”, met heñvel e chom o c'hefridi : gouzaviñ a-berzh Doue. Meur a wech e vez komzet er Bibl eus pobl Israel o lazhañ ar brofeded kaset dezho gant Doue. E grez ar gristeniezh, mard eo bet drouklazhet ha merzheriet an darn vrasañ eus ebestel Jezuz hag un toullad mat a gimingaded¹⁷ kaset da avielañ er broioù pell e-kerzh ar c'hantvedoù, n'eo ket bet lazhet kalz a welourion, kement ha ma ouzon. Ober goap outo, ne lavaran ket, hag o c'homzoù

¹⁴ Gouzavadenn, gouzav : *avertissement*.

¹⁵ Gworzheg : *saout, chatal, hervez brezhoneg ledenezioù Bazh ha Rewiz ; « gwartheg » e kembraeg.*

¹⁶ Kiier : *liester « ki » e brezhoneg ledenez Vazh, met ivez e lec'hioù all evel tro-dro da Gemperle.*

¹⁷ Kimingad : *missionnaire*.

kemeret evit sorc'henoù ha koñchoù born gwrac'h kozh. Abeg an dra-se a zo marteze da gavout gant stuz ar welourion : ne oant ket tud uhel-renk, met tud dister ha dizesk peurliesañ ; souezhus an niver a vesaerion deñved pe saout en o zouez : Bernadetta Soubirous e Lourdez, Mélanie Calvat ha Maximin Giraud er Saletta, Lucia Do Santos ha Jacinthia ha Francisco Marto e Fatima... Setu perak en em c'houlennan a wechoù : “Met perak ned a ket Jezuz pe ar Werc'hez Vari d'en em ziskouez war-eeun d'ar re a ren ar bed hag a zo atebek eus an holl euzhusterioù gwadek pe get a zisleber kement krouidigezh an Aotrou Doue, ha lavarout dezho, mar ne baouezont gant o muntroù, lazhadegoù, barrletadoù¹⁸, laeroñsioù, gevier, lezennoù fall, ha me oar-me... e kousto ker d'o ler”.

Gouzout a ran mat e oar an Aotrou Doue, gwelloc'h egedon, an doare mat da ober evit hor gouzaviñ, hag e c'houlennan pardon outañ da vezañ bet ken hardizh betek mont da vurutellañ E zoare d'ober, hogen, hep mankout d'ar bri a zlean dougen dezhañ e tegasan uvel da goun memestra degont Sant Paol a zo enoret dibar gant an Iliz er bloaz-mañ. Pa ne oa nemet Shaoul, diskibl ar Farizian Gamaliel, en devoa kemeret perzh e merzherinti Stefanos (St Steven) kentañ merzher kristen, hag edo war hent Damask evit ober kement-all da Gristenion ar gêr-se war urzh Arc'hveleion Jeruzalem. Tostaat a rae ouzh kêr Damask pa voe gronnet a-daol trumm gant ur sklerijenn o tont eus an neñv a reas dezhañ kouezhañ d'an douar hag e klevas ur vouezh a lavaras dezhañ : “Shaoul, Shaoul, perak am heskinez ?”, “Piv out-te Aotrou ?” a c'houlennas Shaoul, “Me eo Jezuz, an hini a heskinez, sav endro ha kae e kêr hag e vo lavaret dit ar pezh ac'h eus da ober”¹⁹. Sevel a reas met ezhomm en devoe eus skoazell ar wazed a veaje gantañ evit mont e-barzh Damask rak deuet e oa da vezañ dall, hag e chomas hep gwelout e-pad tri devezh. Ne welas a-nevez ha ne voe sklerijennet e spered

¹⁸ Barrletadoù : *blasphèmes*.

¹⁹ Oberoù 9, 3-6

gant ar Spered Santel nemet pa voe lakaet warnañ daouarn Anania, un diskibl eus Damask, kaset gant Jezuz. Goude-se, ur wech degemeret gantañ ar vadeziant ha komprenet e fazi bras, e teuas da vezañ Paol, abostol bras ar C'hrist, "abostol ar broadoù" evel ma vez anavezet gant an Iliz. Diaes e voe d'ar Gristenion bet heskinet garv gant Shaoul, hen degemer goude-se en o zouez evel diskibl, met se a greñvaas hep mar ebet nerzh St Paol da brezeg Aviel Jezuz gant muioc'h a entan eget ar re all, en ur adsevel ha gwellaat a galz pezh en devoa klasket distrujañ.

Ma ! Un tammig aner eo marteze va arguzennadur, rak an Aotrou Doue a hañval bezañ mennet er mare-mañ da arverañ a-benn nemeur araezioù bras. Abaoe pell endeo En devoa komzet eus ur gouzav bras a gasfe emberr, en un taol trumm, da bep hini ac'hanomp, kristen pe angristen e vefemp, da ziskouez deomp an oberoù mat hag an oberoù fall graet ganeomp a-hed hor buhez, ha kinnig a rafe deomp an dazeilad-mañ : bezañ a-du krenn gantañ pe bezañ a-enep dezhañ ? Deomp da zibab, rak a-benn nemeur e vo kastizet garv hor bed en abeg d'e holl bec'hedoù o vont bepred kreñv-ouzh-kreñv betek ober dic'hlannañ ar gib.

Mar ne fazian ket e voe kroget da gomz eus ar c'houzavadenn veur-se adal 1880, hag e Breizh e oa, gant ar welourez ha marzc'houliazez²⁰ eus Blaen, Mari-Juli Jahenny (1850-1941), met abaoe ez eus bet meur a lec'h ma voe komzet ivez eus ar gouzav meur-se : San Damiano (Italia), Garabandal hag Escorial (Spagn), hag un tammig e pep lec'h dre ar bed er bloavezhioù diwezhañ-mañ, dreist-holl e Stadoù Unanet Amerika – sinoù eus darvoudoù a-bouez o tont war ar vro-se pa soñjer petra eo S.U.A. – hag a-nevez e Breizh abaoe miz Eost 2008, gant div vaouez, mammoù a diegezh, Myriam ha Mari (lezanvioù eo), o paouez embann ul levr eus ar c'hemennadennoù roet dezho gant Jezuz : "*Préparez-vous... J'arrive !*" (Editions Résiac BP 6, F 53150 Montsûrs), hag el levr-se e lavarfe Jezuz e c'hoarvezo ar gouzav e 2009. Emaomp o kregiñ gant miz Here 2009, ne chomfe ket kalz a amzer neuze ; bezomp war evezh enta !

Bez' e vo ar gouzav, mat ! Met petra a vo goude-se. War pezh a hañval, hervez ar c'hemennadennoù niverus, e vo dizurzhioù bras, gourfreuzoù, kevergolloù, sponterezh o kreskiñ, brezelioù er Reter Nesañ - Iran, Israel, Afghanistan, Pakistan ? – ha donedigezh ur

gouarnamant bedel. Gant an heklevioù hogos pemdeziek hon eus war pezh a c'hellfe c'hoarvezout er rannved-se, ha kement-mañ atodet da freuz-stal ar bankoù hag ar moneiz n'eo ket ret bezañ profed bras evit kompren e vefe an dra-se ur saviad a zoare evit gourarc'hiñ²¹ evel-just ur gouarnamant bedel, pezh a zo bet, forzh penaos, c'hoantaet, prientet ha programmet abaoe bloavezhioù gant bankerion vras ha kellidourion²² etrevroadel²³ o deus gouezet mat-tre endeo kas war-raok o *schmilblick*, dre zistignañ brezelioù lec'h ma karent, ha gounit kalz arc'hant war ar marc'had diwar goust buhez paour-keizh tud a grede dezho e skuilhent o gwad evit difenn o mammvro. Abaoe derou an enkadenn gellidel²⁴ bedel e vez anv dizehan er meziennoù, gant politikerion dazaterset²⁵, gant gwazourion a levezon²⁶, gant dezrannourion²⁷ bolitikel ha kellidel, eus an aotrouniezh vedel-se hor befe un ezhomm mallus anezhi, anez-se ne vo tu ebet da lakaat an armerzh da adloc'hañ, na da zigreskiñ evel-just ar riskl e vefe distignet fiñvadoù kevredigezhel a-bouez, gant tud kounnaret a goll o labour a vil vern bep sizhun. Evel-se e vez prientet tamm ha tamm ar c'hedveno da asantiñ d'ur gouarnamant bedel, evel ma vez asantet e vefe krennet war ar frankizoù hiniennel – dreist-holl en Amerika – war zigarez stourm a-enep d'ar sponterezh. Hogen, piv a zo kiriek d'ar sponterezh-se mar n'eo ket ar re o deus kaset ar brezel er Reter-Nesañ ? Bepred ar c'hi a grog en e lost !

Evit Jezuz en E gemennadoù d'ar welourion, ez eo kement-mañ ar pezh a zo bet diskuliet gant an Aotrou Doue, setu tost da 2000 vloaz, d'E abostol Yann, hag embannet e levrenn ar Bibl anvet dres "Diskuliadur". Hervez Hor Salver e vefe ar gouarnamant bedel-se evit prientiñ donedigezh an Antikrist, setu perak e c'houlenn ouzhomp adlenn pervezh Diskuliadur St Yann. Un tammig tenn eo lenn ha kompren an Diskuliadur, met evit ar re a zo skourret ouzh ar genroued, it war al lec'hienn <http://apparitionsmariales.org/> hag e vo kavet ganeoc'h titouroù e-leizh a-zivout ar

²¹ Gourarc'hiñ : *exiger*

²² Kellidour : *financier*.

²³ Holl izili ensavadurioù evel Fabian Society, Pilgrims Society, RIIA, CFR, Bilderberg, Trilaterale, IFRI, IISS, ma vez kuzhet o falioù gwirion, ha liammet war-eeun pe ameeun ouzh ar Frankvasonerezh. "*Gouarnet e vez ar bed gant tudennoù estr eget ar re empenet gant ar re na vez ket o daoulagad o splujañ er banelloù*" (Benjamin Disraeli, stadrener saoz).

²⁴ Enkadenn gellidel : *crise financière*.

²⁵ Dazaterset : *interviewé*.

²⁶ Gwazourion a levezon : *agents d'influence*.

²⁷ Dezrannour : *analyste*.

²⁰ Marzc'houliazez : *stigmatisée (personne)*.

c'hemennadennoù-se. E derou va fennad em eus lavaret e oa bet amsavet ar c'hi-deñved gant ar bugul-tredan, un tammig heñvel ez eo gant ul lec'hienn war ar genroued ; ne vez ket amsavet ar welourion ganti, met lieskementet e vez ganti ar galloud skignañ hag al lavigerion o deus ac'haez²⁸ d'un toullad kemennadennoù war meur a zanvez. Graet mat eo al lec'hienn. Tud a lavar ez eo ar genroued un ardivink diaoulek dre ma vez skignet traoù hudur gantañ. Bez' e lavarfen kentoc'h, evel ma vije bet lavaret gant va mamm – Doue d'he fardono – ez eo ar genroued evel teod Aezopez : bez' e c'heller lavarout gant an teod kalz komzoù mat, hogen ivez kalz komzoù drouk. N'eo ket ar benveg a zo kiriek, neptu eo, an hini a ra gantañ ne lavaran ket.

Kalz gourfreuzoù²⁹ ha kevergolloù³⁰ a vez prometet d'hor bed pec'her, rouez-kenañ e vo ar broioù n'o devo ket da c'houzañv diouto. Iskis eo ; bez' e vo unan memestra : Breizh, hor bro-ni, ha Jezuz a lavar da vMyriam ha Mari d'an 8 a viz Genver 2009 : *Va bugale, va bugale vihan, kalz a chañs hoc'h eus en ho kornad bihan a Vreizh. Bez' e c'hellit meuliñ ha trugarekaat ho Toue evit ar c'hras-mañ, rak n'ho pezo ket da c'houzañv*

²⁸ Araez : accès.

²⁹ Gourfreuz : cataclysm.

³⁰ Kevergoll : catastrophe.

an holl c'hourfreuzoù o vont d'en em zichadennañ, dre maz oc'h gwarezet gant va mamm ar Werc'hez Vari ha Santez Anna. Bez' e c'hellit o zrugarekaat ivez. Bez' ez eo a-drugarez da feiz ho tadoù kozh hoc'h eus an holl chapelioù-se dediet d'am Mamm Santel hag ivez da Santez Anna.

En ur lenn an dra-se e kave din klevout ar c'hantik brudet “*Da feiz hon tadoù kozh*” o tregerniñ dindan bolzioù iliz-kador Kemper, pa gemeren perzh e Gouelioù bras Bro-Gernev, setu tost da bemp bloaz hag hanter-kant. N'ouzon ket avat ha kemeret perzh e vez c'hoazh gant ar c'helc'hioù en oferenn sulvezh ar gouelioù-se, ha ma vez kanet ar c'hantik brav-se, rak ouzhpennet e vez gant Jezuz : “*Met abaoe, va bugale, abaoe, pelec'h 'ta eo tremenet ho feiz ? Pelec'h 'ta emañ-hi ?*”. Komzoù heñvel e keñver Breizh a oa gant gwelourez Vlaen setu tremenet ur c'hantved, ha marteze eo bet lavaret heñvel gant gwelourez Kerizinen. Kement-mañ a verk dalc'husted ha pasianted Doue en hor c'heñver, hag a ziskouez ivez truez Doue e keñver ar vibion gablus, en abeg da feiz an tadoù. Dalc'homp-soñj enta eus hon Tadoù, ha gant doujañs lavaromp bennozhdoue dezho !

Yann MIKAEL

Father Zakaria Boutros

Hanter-kant vloaz studi war an Islam o deus graet gant an Tad Zakaria Boutros ur c'hevarouezour³¹ war ar relijion-se, pezh a ro dezhañ aotrouniezh da vreutaat war an holl arvezioù anezhi. Beleg uvel, leun a zouster, e gemennadenn « *Komzoù a wirionez* », skignet er Reter-Nesañ dre loarell an dirsav³² « *Al-Hiyat* » a horjell ar bed muslimat.

Klaoustre a ra, e-kerzh e abadennoù skinwel, gant ar Vuslimiz ensellout pezh a vez anvet gantañ dislavaroù kealiadurezh an Islam, dislavaroù na fell ket d'ar Vleinerion relijiel dioueliañ, ha na c'hell ket muslimad an diaz kompren. War an divoud-se e lavar : « *Ne c'hell ket an Islam gouzañv an atersiñ kefredel, hag en abeg da zislavaroù ar C'horan, da re an hadithoù, da gealiadurezhioù faziiek, den ne c'hell kompren. Setu perak, war ar c'hrafoù-mañ e tistaol an atersoù ha kement studi 'zo. « Bez' ez eo an Islam, ret eo deoc'h hen degemer evel m'emañ », eme an Tad Zakaria, « gant an aon da vezañ drouklazhet.*

Dizehan e kav an Tad Zakaria abeg e kelennerzh an Islam. Abegiñ a ra ivez ar profed Moc'hammed e-unan, ma vez buket e zezev dreist pep tra war

brederioù danvezel ha douarel. « *Pelec'h emañ rouantelezh Doue, klod Doue, e garantez evit pep den, ar silvidigezh ? Petra eo kefridi ur gwir profed Doue ?* »

Savet ez eus bet kounnar ruz diwar skingasadennoù an Tad Zakaria er bed muslimat. Lakaet eo bet priz war e benn evit 60 milion dollar. D'an dra-se e respont ez eo e gentelioù atahinus ur broud evit ar Vuslimiz da studiañ donoc'h o feiz. « *Va hentenn : berrder, resisted, skog evit an diemskiant* ».

Bez' e voe se degont James, un Egiptad a grogas da sellout ouzh « *Komzoù gwirionez* », diwezhat en noz, pa oa an tiegezh o kousket. « *Kounnaret on bet a-enep d'an Tad, pa 'm eus gwelet ar skingasadenne-se evit ar wech kentañ. En enep eo bet fellet din arbennañ e haeradennoù* ». Evit-se e grogas da studiañ ar C'horan hag ar Bibl evit diarbenniñ kentelioù an Tad, pezh en deus kaset anezhañ da c'houzout muioc'h diwar-benn ar Gristeniezh hag an Islam. « *Kaset on bet da brederiañ war atersoù liesseurt, ne oan ket bet chalet ganto a-raok. Kemmet eo bet va meizerezh, ha sklaeroc'h eo deuet an traoù da vezañ evidon* ».

Dont a reas James da feiz Jezuz-Krist en ur sellout ouzh skingasadennoù an Tad Zakaria. E bried Mari a heulias anezhañ nebeut amzer war e lerc'h. War an

³¹ Kevarouezour : expert.

³² Dirsav : station.

divoud-se e lavar : « *Emouezet em eus e oa an Islam ur relijion faos. Stok ouzh ar wirionez, eo bet roget ar ouel a c'holoe va foell. Santet em eus e oan dieub. Dieubet on bet. Un darempred dihanterat etre ni hag ar C'hrist ez eo ar vuhez. Ar vuhez eo ar C'hrist* ».

Bez' e lavar an Tad Zakaria ez eo ar bed leun a dud evel James ha Mari. Milieroù a Vuslimiz a weladenn e lec'hienn Web « *Pal Talk* » bep miz. Dont a reont evit diarbenniñ kelennadurezh an Tad, ha tamm ha tamm e piaouont anaoudegezh Jezuz-Krist hag e gemennadenn a garantez.

Kantroet eo bet gant an Tad Zakaria Boutros muioc'h eget 500 musulmad, hag evit un darn vat anezho leaned (imamed, mollahed, prezegegerion ha kimingaded an Dawa'h), an Doktor Muhammad Rahoumy, dean kozh skolbenn islamek Al Azhar, hag ar re, dre un difraeadenn gefredel hepken, o deus fellet dezho diarbenniñ e arguzennoù.

*Kemeret hon eus ar pennad-mañ war al lec'hienn : **notredamedekabylie.com**, ha kavet hon eus e talvez ar boan e lakaat e brezhoneg evit lennerion Imbourc'h. Troet diwar ar galleg gant **Yann Mikael** ha **Paol Kalvez***

Notennoù mesk divesk

Kemennadenn a-berzh

« *Kevedigezh Vreizh a Sevenadur* »

Abaoe he savidigezh e 1961, gant Maodez Glanndour ha Vefa Sant Pêr, e kinnig hor « *C'hevredigezh Vreizh a Sevenadur* » da zistanañ ar mankoù evel dianaoudegezh Istor Breizh e meur a vro eus Kreizeuropa pe Retereuropa. Arabat eo deomp evel-just disoñjal kudennoù Breizh !

Setu perak, da geñver 60-vet Kendalc'h an UFCE (Union Fédérale des Communautés Ethniques Européennes) - savet e 1949 war intrudu ar Breizhad Joseph Martray -, a vo dalc'het e miz Gwengolo e Bruksell e vo skignet a-vras ul levrenn e peder pe pemp yezh, en ur zibab da gentañ tudennoù politikel ouzhpenn daou ugent bro. An diell-mañ a ziskouez sklaer stlennoù war binvidigezh sevenadurel Breizh, war he Istor gwirion, war kantwirded he gwirioù hag he yezh da wareziñ. Kounomp, ez eo bet ar Stad C'hall, an hini nemeti da vezañ chomet hep sinañ Karta ar yezhoù minorelaet, krouet dres war atiz an UFCE. Ober a reomp an dra-se rak e kav deomp e c'hellfe ar broioù-se, tapet nevez 'zo o dizalc'hiezh pe o emrenerezh, bezañ ho gwellañ kevredidi pe difennourion en dazont, gant ma vefemp anavezet ganto.

Bez' e chom etre 3000 ha 4000 € da baeañ evit moulladur al levrenn-se, gervel a reomp da vrokusted ar Vrezhoned evit hor skoazellañ. Intrudu ha kalonegezh Pêr Le Moine, Yann Kergren, ha pet tud all a c'hwezhañ feiz ha kalon en holl vugale Breizh, emouez ouzh ar brokad-buhez endalc'het el levrenn-mañ, elfenn dreistbevañ, gouestl dazont evit Breizh.

Kevaotit ho chekennoù war anv *L'Association Bretonne de Culture* ha kasit anezho d'ar chomlec'h-mañ : B.P. 3, 56770 Plouray, Breizh. Trugarez evit Breizh ! Pêr le Moine, Yann Kergren, Youenn Kraff.

A-zivout an anv « *Breizh-Izel* »

E 1964 e kemeris perzh e “Kamp etrekeltiek ar Vrezhonegerion” e Lokronan-Leon. Evit ar sulvezh em boa graet va soñj mont da adkavout Kelc'h Keltiek Gwenvenez-Penfaw a gemere perzh e Gouel Sant-Loup Gwengamp. Yann Kerlann – Doue d'e bardono - o c'houzout an dra-se a c'houlennas ouzhin ha tu a vije dezhañ dont ganin em c'harr betek Montroulez, e vro c'henidik mar ne fazian ket, evit gweladenniñ mignoned pe kendirvi.

Plijus e voe ar veaj rak gant Kerlann e oa bepred traoù da zeskiñ o vezañ ma oa ur c'helenner ha ur c'honter dispar. Kontañ a reas din, etre traoù all, ar sorbienn-mañ bet c'hoarvezet a-raok ar brezel : Paotred Strollad Broadel Breizh o devoa peget skritelloù un tammig e pep lec'h, ha skrivet e oa bet warno e lizherennoù bras “Breiz Atao”. Deiz ar foar, e Montroulez pe en ur barrez all, ur c'houer a anaveze a c'houlennas outañ a-zivout SBB hag al liketennoù-se : “Met perak e fell dezho ober “**brezel atav**”. N'en devoa ket komprenet dik ar ger “Breiz” ; e gemeret en devoa evit ar ger “brezel”, setu perak e rae an aters iskis-mañ. Souezhet e voe Kerlann, hag e klaskas displegañ d'ar paotr e oa “Breiz” kement ha “Bretagne” e galleg, Breizh penn-da-benn. Ha setu ar paotr da eilgeriañ dezhañ : “E galleg e vez lavaret “Bretagne”, hogen e brezhoneg e vez lavaret “Breizh-Izel”. Evitañ e oa “Breizh-Izel” evit Breizh a-bezh, ne oa ket a c'her all.

Goude-se e tisplegas din Kerlann e oa gwir an dra-se. Ur saver kanaouennoù donezonet e oa, ha merzet en devoa an dra-se er c'hanaouennoù-pobl, nepred ne veze anv enno eus “Breizh” hepken, met eus “Breizh-Izel” bepred, hag heñvel e oa gant ar c'hantikou. Kozh-kenañ e tle bezañ an anvad “Breizh-Izel”, arveret evit envel an tiriad nevez annezet gant ar Vrezhoned en tu all d'ar Mor Breizh en Arvorig. Mard eo bet miret an anvad-se da c'houde evit envel hepken ar rann-diriad e-lec'h ma veze komzet c'hoazh brezhoneg, ne zlee ket bezañ se er penn-kentañ. Kement lec'h bet annezet gant ar Vrezhoned ha bet merket ganto gant an anvioù-lec'h brezhonek o deus lezet war o lerc'h a zo bet “Breizh-Izel” un deiz ; Bro-Wenrann, lakaet e “Breizh-Izel” gant ar Jakobined e

1794 hen prou aes a-walc'h. Ne zle bezañ nemet er 17-vet pe 18-vet kantved e vije bet ijinet an anvad "Breizh-Uhel" evit diforc'hiñ diouzh an anvad "Breizh-Izel" a vije bet miret neuze evit ar brezhonegva hepken. Un dra ijinet gant ar vrientinion c'hallekaet moarvat, met dianavezet gant ar vrezhonegerion hengounel. **Yann Mikael**

Gwallziforc'h ha "gwallzifoc'h" 'zo

Diskleriet eo bet andegemeradus d'ar 6 Gouhere 2009 gant *Lez Europa Gwirioù Mab-Den* reked kevredigezh « *Solidarité des Français* » dodet a-enep da freuzidigezh un dasparzh d'an ezhommeion a bredoù ma oa kig-moc'h e-barzh, e miz Kerzu 2006. Berzet e oa bet an dasparzh predoù-mañ gant prefed Paris war zigarez e vije bet gwallziforc'hus e keñver tud 'zo - muslimiz sañset -, ha ma oa ur riskl ma savfe dizurzhioù kevredik diwarnañ.

Ur gevredigezh lezenn 1901 eo « *Une Chorba pour tous* ». Dasparzhañ a ra ar « *chorba* » (soubenn hengounel ar Maghreb) evit ur bennozh-Allah, e-pad miz ar ramadan, dindan un deltenn, savet en 19-vet pastell-vro Paris abaoe 1992. E 2006 he deus bet ar gevredigezh-mañ ur skorenn digant Maerdi Paris, 23000 € digant ar Font Kevredigezhel Europat, 20000 € digant Western Union, 5000 € digant Aerborzhioù Paris, kelliderez ur stael FONGEP gant Mavdiernezh ar Yaouankiz hag ar Sportoù. Maerdi an 19vet, Maerdi Paris hag an OPAC o deus lakaet en arempred ar gevredigezh-mañ un dachenn lec'hiet 29 straed Riquet. *Solidarité des Français* n'o devo nepred ar chañs-se, ne hañvalont mui bezañ mestr en o bro hiviziken.

Lizhiri al lennerion...

Hor mignon ha lenner feal Youenn Grall o chom e Waukegan Illinois USA a lavar din en deus priziet va fennad "*Lavar din da anv...*" bet embannet e Kannadig Imbourc'h niv. 59. Ouzhpennañ a ra : "*A-zivout anvioù, amañ un anadenn iskis hag iskriv he deus en em ziorroet, an anv "Brittany" roet da gentanv d'ar merc'hed, gant ur skalfad a zoareoù disheñvel da skrivañ ha lizherennañ an anv-se :*

Brittney, Britney, Britteeny, Britt-Anny gant ur gedell mar plij, ha me oar-me... Kroget ha loc'het en deus an darreuziad-se war-dro ar bloavezhioù c'hwegont ha seikont a gredan, diouzh oad ar merc'hed a zoug an anvioù-se. Perak ? N'ouzon ket ! Anavezet eo an Amerikaned evit na vezañ deuret kalz gant diskiblezhioù 'zo evel istor, tironiezh, geopolitik, kentoc'h gwalleget ganto, ha rouez-tre eo niver an dud a oar pelec'h emañ lec'hiet ha petra eo Breizh. Neuze marteze eo bet devoudet dibab an anvioù-se, dre hesonded ar ger e-unan, "i suppose" piv oar ?

Trugarez da Youenn Grall evit e lizher hag an titouroù-mañ. Plijadur a ra deomp gwelout anv Breizh douget gant merc'hed en Amerika, zoken mard eo dindan stumm saoznek an anv, ha dibabet muioc'h dre e hesonded eget dre un anaoudegezh don eus hor bro. Kement-mañ a ra din soñjal en anv roet ar muiañ d'ar baotred en Europa, er mare-mañ, piv eo ? Souezhet e viot, "Mohamed" eo, e Bruksell, e London, en Oslo (Norvegia), Malmö (Sweden), e Rotterdam, Amsterdam, e Milano (Italia), e Seine-St-Denis, Marseille (Frañs). Argemmoù 'zo d'an anv : Mohammed, Mahmoud, Muhammad, hervez hengoun ar vro orin, met gant an anvioù-se n'eus ket ezhomm, evel evit "Brittany", d'en em c'houlenn evit petore abeg int bet dibabet, "*ça coule de source*" evel ma lavar ar C'hallaoued. *No comment !* Gwelout da skouer : <http://devilliers.blogmilitant.com/> **Y.M.**

Evit prientiñ an Nedeleg e pep gwirionez ez eus bremañ ul levr brav pedennoù ha lennadennoù evit an amzer kent ha goude an Nedeleg, diwar troidigezhioù Maodez Glanndour, Marsel Klerg, Pêr ar Gall ha Job Lec'hvien, e 1308 pajennad ment 17x11, e gwerzh e ti Mari-Terez Calvez 12 Petit Raffuneau, 44700 Orvez/Orvault pe Tepod Gwilhmod Kêrgreven 29800 Trelevenez, 50 euro + 10 euro mizoù-kas.

Ur prof evit Nedeleg : *An Emgav Chanter ha danevellou all*. Un dastumad a bemzek danevell gant Yann MIKAEL, rakskrid gant Pierrette Kermoal, 280 pajennad, moulet e ti Ouestelio Brest, 18 € franko Breizh ha Bro-C'hall ; er-maez ar C'hwec'hkogn 20 € – kasit ho chekenn da : Yann MIKAEL 12 straed René Giraud 44130 BLAEN

Mererezh

12 € eo ar skodenn emezellañ da EAT a ro ar gwir da resev *Kannadig Imbourc'h*. (15 € er-maez ar C'hwec'hkogn). Talet e vez e penn-kentañ ar bloaz (pemp kasadenn da vihanañ). Ar chekenn a zo da gas war anv EAT pe Imbourc'h da : E.A.T., c/o Yann MIKAEL 12 straed René Giraud 44130 BLAEN - Roll an niverennoù pe oberennoù n'int ket c'hoazh diviet a c'heller kaout o skrivañ pe war : <http://kannadig.chez-alice.fr/>.

Skridaozerezh

Ar pennadoù a zo da gas da : jean-mariemichel@neuf.fr , pe dre ar Post da rener Kannadig Imbourc'h : Yann MIKAEL, 12, Straed René Giraud, 44130 BLAEN. Ar pennadoù ne engouestlont nemet ar re o deus skrivet anezho. Moulet ez-prevez gant an embanner : **Emglev an Tiegzhioù**. Kergreven - 29800 Trelevenez - ISSN : 1144 357X

